

**KIS-696 – Br. kantaезд, kemblac'h, benevelour,
Gl. hyponyme, hyperonyme**

(IK da GE – 30 08 00)

Ha tu a vefe deoc'h da reiñ dimp un nebeud resisadurioù war :

Br. **kantaезд** : war peseurt tachenn eo bet arveret ? Petra eo ar c'hemm etre *trivli-* ha *kantaезд* ?

Br. **kemblac'h** : war peseurt tachenn(où) eo bet arveret ? Peseurt kemmoù a lakait etre *kemblac'h*, *keñver*, *kenfeur*... ? Ha gouzout a rit un dra bennak diwar-benn orin *kemblac'h*, zo meneget meur a wech e geriadur Vallée ?

Br. **benevelour** : petra eo abeg ar **v** kreiz ? Perak ar stumm benevelour, kentoc'h eget *benelour* ?

Gant peseurt gerioù e rit (pe e rafec'h) evit treiñ ar galleg **hyponyme** hag **hyperonyme** ? Soñjet hon eus e *gouranv* ha *gouanv* ? *X zo (ur) gouranv da Y* ? pe un dra bennak all ?

(GE da IK – 01 09 00)

Br. **kantaезд** a arverer er Vredoniezh, er Bredelfennerezh hag er Brederouriezh. Merkañ a ra ur meizad ; evel bepred avat en degouezh e wisk kemeradurioù diseurt hervez an diskiblezhioù hag an aozerion (an *Affekt* freudek zo disheñvel mat diouzh an *Affekt* huserlek, h.a.). Dre vras e c'haller ober eus ar ger an anvad erdalekañ evit kement santad, santadenn, from, trivliad, angerzh... 'zo. Klasket 'm eus distrouezhañ an tolead-se eus hanc'herieg ar Brederouriezh e KIS-502, La-10, pp. 406 hh.

E brezhoneg e ser va labour war an Anadennoniezh, e'm eus strivet da sevel un daolenn gevanlen eus an termenoù kevenebet en domani-mañ : **kantaезд** / **eraez**-, **kantaезд** / **kantouez**-, **kantouez** / **kedouez**-, **kantaезд** / **ketaez**-, h.a., sl. KIS-381, La-09, pp. 275 hh. Evel just, seurt termenù arbennik, hep kevatal er yezhoù all evit lod, n'o deus ket da vont e 'z keriadur !

Br. **trivliad** zo ur buhezad stadet ha n'eo ket ur meizad danzeet, a c'haller despizañ evel strafuilh war un dro bredele ha bevedel en ersav ouzh ur blegenn (donoc'h, kempleshoc'h ha padusoc'h eget ar **from**).

Br. **kemblac'h** a arverer er Jedoniezh hag en Elektronik (Stlenneg). Divrazet eo bet e sterioù arbennik e KIS-056, La-04, pp. 34-35. Hervez GP (e 1971, bloaziad an notenn) e teu eus *kemm+lec'h* (emaon o paouez pellgomz gantañ : e veno eo bepred).

Br. **benev-**. Kemm hon eus lakaet pell 'zo etre *benel, gourel*, termenoù gramadeg ha *benevel, gourevel* termenoù bevoniell, poblañsel, h.a. Amprestet hor boa Kb. *benyw, gwryw* en o furm, met n'eo ket en o ster, rak an daou a dalvez ken evit ar C'hramadeg, ken evit ar Vevoniezh. Moarvat ez eo bet neuziet Kb. *benyw* diwar batrom *gwryw*, hemañ displeget evel dezneuziadur Kt. ***u9iro@u9i9os** (GPC 1742).

Gl. **hyponyme, hyperonyme** zo bet luniet gant ar strukturelourion o tedalvoud ar Jedoniezh d'ar C'hramadeg evit deskrivañ ar c'hemmoù ental hag erdal 1° dre ar *gannadur* (Gl. *inclusion, hyponymie*) : “« ki » zo *gannat da* (ϕ, Gl. *inclus dans, hyponyme de*) « loen »” ; 2° dre an *endalc'hadur* (□, Gl. *contient, hyperonyme*) : “« loen » zo *endalc'hat da* (Gl. *contient, est hyperonyme de*) « ki »”.

Ne gav ket din e ve sklaerius ober gant *gouranv, gouanv*, na vent komprenet nemet dre zistreiñ d'an termenoù gallek ez int plaket diwarno. Gwell dezrannañ ar c'heñverioù poelloniell a zo etre ar gerioù :

Mar keñverier erdal hag ental « loen » ha « ki », e lavarer ez eus	
gant « loen » un erdal brasoc'h	gant « ki » un erdal bihanoc'h
un ental bihanoc'h	un ental brasoc'h
ha da heul ez eo	
« loen » <i>uc'herdal</i> hag <i>isental</i> da « ki »	
« ki » <i>iserdal</i> hag <i>uc'hental</i> da « loen » .	

Da zibab ez eus enta
 etre Br. *uc'herdal* hag *isental* evel kevatal da Gl. *hyperonyme*
 etre Br. *iserdal* hag *uc'hental* evel kevatal da Gl. *hyponyme*

Da 'm meno, evit derc'hel ar c'henglot etre ar raganvioù *uc'h-* hag *hyper-*, *is-* ha *hypo-* e ve gwell dibab **uc'herdal** hag **iserdal**.

Alese e kinnigan **uc'herdal** aa. & g.-**ioù** (Gl. *hyperonyme*) hag **iserdal** aa. & g.-**ioù** (Gl. *hyponyme*). Merkomp eo bet arveret an termenoù-se endeo e KIS-092, La-05, p. 68, gant an diforc'h ma skrivemp neuze *userdal* (n'hor boa ket unvanet c'hoazh arverioù dibarek ar rakgerioù *us-*, *uc'h-*, *ez-*, *ec'h-*).